

Etre an dachenn hag ar prad ☺

lwan
Etre an dachenn hag ar prad, loulou, Etre an dachenn hag ar
bertoc'h
prad, Etre an dachenn hag ar prad, a zo ur
pont ouzoc'h ervat.

1. Etre an dachenn hag ar prad, loulou,
Etre an dachenn hag ar prad,
Etre an dachenn hag ar prad,
A zo ur pont, 'ouzoc'h' ervat.
2. Nan eus hini 'vit hen tremen
Nemet ur vandenn skolaerien.
3. " Taolet ma levrioù 'barzh an tan,
Pa roet 'nê d'am breur bihan.
4. - Tevet, ma mab, 'leret ket se,
Kak c'hwil a zo niz d'ar c'nure.
5. - Na pa vijen niz d'ar person
Ur plac'hig 'garan em c'halon.
6. Ur plac'h vihan eus a Gerne,
Glas he lagad, melen ne blev.
7. D'ar sul d'an ofer'nn-bred pa'z an,
Pater nag Ave na laran.
8. Met o'r ur sell dreist korn ma skoa(z)
C'hoant gwelet ma dous koant am boa.
9. Me 'wel anei 'kreiz an iliz
Ken kaer ha flour pe fourdeliz.

Poz 3 : Pa = pe. Poz 4 : Tevet = tavit. Poz 8 : o'r = ober

10. Ur c'hoef tul brodet war he fenn
A gouste pemp skoed ar walenn.
11. Ur c'hoef binan 'oa dindanañ
Dantelezenn eus ar c'haerañ.
12. Bloukoù-arc'hant war he botoù,
Cuzh o derc'hel 'oa rubanoù.

Dastumet e Ploubêr d'an 18/7/52.

Evit an ton, sell. Duhamel, Musiques
bretonnes, p. 140, niv. 271.

Evit ar c'homzoù, sell. Soniou
Breiz Izel gant an Uhel, levrenn 1,
pajenn 151 : Me n'vin na beleg na
manac'h. Chansons populaires du pays
de Vannes gant L. Herrieu, pajenn 1.

